

Chby

A

**BARZONEK**

**KANAOUEN AR VRETONED.**



War don : *Ann hani góz.*

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

O ial d'ar brézel paotred ter,  
Paotred vâd ha séven er ger.

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.



Yn. 200

Briz...

Téc'het a ra Saôz penn-da-benn,  
Pa lévéromp ni : « *torr hé benn!* »

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

---

Hoghen, klévit enn eureujou,  
Klévit kanaouen ar biniou.

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

---

O Breiz-Izel pégher braô!  
Koad en hé c'hreiz, môr en hé zrô!

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

---

Allas! mar tléann Breiz kuitat,  
Mé wélô gant ma daou-lagad.

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

Mirit, breùdeùr kéz, hô penn-bâz,  
Hô pleó hîr, hô pragou-brâz.

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

---

Gourennit mât! Eur gourenner  
En deuz kalon ar merc'hed kaer.

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

---

Mé trouc'hô ma zéôd em bek  
Kent diziski ar brezonek.

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

---


Karantez d'id, karadek brô!  
Arvôrik kôz, douar zerô!

Ni zo bépred  
Bretoned,  
Breiz-Izel tud kaled.

4  
Koulskoudé, dreist ann holl vadou,  
Karomp ar C'hrist, doué hon tadou.

Ni zo bépred  
Bretoned;  
Breiz-Izel tud kaled.

GRET GANT A. BIJEUX  
Euz a ger ann Orient.



---

E PARIS, LEK ET E GWASKEREZ GANT E. DUVERGER,  
RUE VENEZIE, 4.